

- 131 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

48. AN TOUR PLOMB

( follennoù 156 - 157 )

Kenta vellas an tan en tour plomb  
Voa eur c'hloarek he distrei deus Rom.

A lavaras da Kemper illiz  
E man krog an tan en ho c'hillis.

E man krog an tan ebars en tour  
Na vo ket lazet evid dour.

Gant bara gwinis a les bron  
E voa lazet an tan en tour plomb.

Nag ar sakrist a lavare  
Dan otrouu personn eun deïs a voe :

- Me a vel an erouan var beg an tour  
Hag en enon evel eur skour.

An otrouu personn a lavare  
Dan otrouu kure eun deïs a voe :

- Kerc'h ar siboëro hag ar sakramant  
Da chasseal an erouant.

An otrouu kure a leve  
Dan otrouu personn eun deïs a voë :

- Me non ket evid entren aman  
Gant ar plomb bervet e diveran  
Hag e lec'h ma koues dewi a ra.

An otrouu personn a lavare  
Dan erouant an deïs a voe :

- Petra klaskes var dro va zi  
Me nen dan ket var dro da hini.

- Da ti te a zo diviniget  
Gant eur plac'h iaouank hag eur kloarek  
O pec'hi eni noz nedelek.

~~~~~  
VVVVVVV

Jannet Puill, klasqueres a henvik 13 gwenver 1851